

9



# CHANSON

355 B

Composet a neve voar sujet

## DAOU DEN YAOUANC

*Voar an ton neve*

Mar gallan gout ar feçon e rancquan composi-  
 - Ur chanson hac ur c'henviat herve va faltasi  
 Voar sujet daou den yaouanq, tud a condition  
 Estumet en ho farros gant an dud a fesson.

Ne oan nemet unec vloa pa in bet commencet  
 Ha dre oll en eum gueven en hent gant ho loenet  
 An hini a ve goassa eguile secoure  
 Ber e gueven an amser ho tremen ho bue.

Pa oan daouzec vloa echu int eet er chatechis  
 - Ac a eum heuillen dare evel ma oa no guis  
 Bete ober ho tri fahsq e mesque ar vugale  
 Bep bla e cresq ur mail e chaden ho amitie.

Er bla varlec'h ma int eet er mes er chatekis  
 E hint commencet ho daou da roulla ho yaouanquis  
 Ho c'hondui a rea d'ar guer deus a bep assamble  
 Evel daou den unisset an ilis gant Doue.

— 2 —

Ho zud ho velet a mercq deus ho fidelite  
A sonjas ho separi an eil deus eguile  
Ar plac'h a ya d'ar gouën pedar leo digantant  
Evit ma c'hanconaje bea fidel dean.

Pa int bet dispartiet an eil deus eguile  
Ne sonje quet gant ho zud ho devoa finesse  
Ar goas a ouie scriva ac a gass lizero  
Eur veach ar sizun ressus da glevet he c'helo.

Pa echuas en amser e teu ar plach er mes  
N'ho quet or bouer d'he ober lianes  
- Hac en eum c'heullen darre evel an eur guentan  
Eur garante ne oar quet evit e distrujan.

Betec eur bla varnuguen in em c'heullet -  
Qen a erruas an urz da denna ar billet  
Neuze an deus renoncet dar plijadurezo  
O doa bet assamble dre an assambleo.

Pa antre an den yaouanc er gramp evit tennan  
E santas e oll vemprou da gommanç da grenan  
Hac e sonjas e tenje an numero izel  
Hac e ranqje separi deus e vestres fidel.

Hasten a eure e zorn pa eo errue e renq  
Hac e tigoeas gantan an numéro ugent !  
Cetu mantret e galon ha beuzet en glac'har.  
Quen a garje e vije eet divar an douar.

Aa oue annoncet dezi gant he gamarado  
Penos en devoa tennet ha pe seurt numero  
E lavaras a voues huel aroc ma partije  
- E voelje e lianan e laca en e bes.

## — 3 —

Ar zul arog me parti o deus quimmiaded -  
 O tont deus ar gousperou int en em rancontret  
 An daelou ho daoulagat a glebie ho diliat  
 En coste ar c'hleur da ober ho c'himiad.

Abaoue hon buguleach ma mestrezic fidel  
 E sòñjan e oam choaset gant Doue eternal  
 Evit bean unisset an eil gant eguile  
 Queit ma vijen leset er bed-man en bue.

Hont daou e voamp ho veva er memes santimant  
 Rac ma speret emesi e voa pareillamant  
 Ee sonje din na vijemp berviqen separet  
 Quet a blije gant Doue hont c'has divar ar bed.

Abalamour da Doue pa ranquan partian  
 Evit merq a garantez ouzac'h a c'houlennan  
 Ar mouchouar so ganec'h o sec'ha ho taelou  
 Ma ellin selli outan betec fin ma deiou.

Dimeus a greis va c'halon e mei va mignon quer  
 E c'hastenan dec'h va dorn da rei ar mouchouar  
 Lequet-an en ho codel ha dalhet mad dean  
 Mar ho pe soulajamant o ton de visitan.

Tachit d'en em gonsoli e queit ha ma veet  
 Ne vo qet hir ho cøñje deus a liou a zouguet  
 Aar ben pemzec de aman ac an de a hirio  
 E vo pep hini ac'hanomp o repos en e ve.

Credi a ran fermamant a pes a laveret  
 Rac evel ma c'herruin e guer a Sant-Briec,  
 E c'houlennin eur billet da vont d'an hospital  
 Ac'hane vin transportet a laquet en douar.



— 4 —

Dindan ar pevar devez ma e bet partiet  
Eo marved ar plac'h yaouanc er guer ac interret  
Daou devez juste er goude e c'herru a c'helo  
E voa maro he mignon Doue d'ho fardono.

Queit a ma verv an eil den en glac'har deguile  
Ne get echu ar respect hac ar fidelite  
Goulennomp oll a galon ma voin recevet  
Gant Jesus hac ar Verc'hes en hevou o urusdet.

FIN

